


— 6 —



CHANSON NEVEZ.

Var ton : *Ar Meliner.*

AR GOAS.

DEBONJOUR déc'h, va douç Jannet, an daelou em daoulagad;
Cetu me deut c'hoas d'ho quelet qen sônjâl dont d'ho quittat,
Qent quittat an nep a garân mui guet qement tra so'r bed;
Pebes calonat evidon, goude beza re garet!

AR PLAC'H.

Meurbet ez on-me estonet, den yaouanq, ous ho quelet;
Sesisset hoc'h eus va c'halon ous ho quelet qer mantret;
Arrêtit, sec'hit ho taelou, ha discléryit franchamant
Petra sinifi ho comzou, petra é ho nec'hamant.

AR GOAS.

Hotemeuranç sur, va mestrez, zo em c'halon qer parfet,
Qen na ouffen-me birviqen e lemel dious va speret :
Rac c'houi noc'h eus nemet mepris ha meprisanc evidon.
Ansavit bremâ hep fentis ha m'en em glém hep réson?

AR PLAC'H.

Me voar e zoc'h rentet captif certain d'an amourouset,
Dre m'oc'h laqet ho speret da re garet un objet ;
Un den yaouanq a dle beza mestr absolu d'e galon ,
Mes c'houi a so, var a velàn, guir esclav da Gupidon.

AR GOAS.

An aour, pa ve purifiet, a dremener dre an tan ;
Ha va c'halonic , va mestres, a zo beuval bras outàn :
Sulvui rit ous va dilezel, sulvui ràn ous ho caret ,
Ha ma zoc'h ouzìn qer cruel, me zo douçen hoc'h andret.

— 7 —

AR PLAC'H.

Da betra teut d'en em dale, den yaouanq, d'am darempret ?
Ne sònjit mui en qementse, rentit tranquil ho speret ;
Laqit ar peoc'h en ho calon , ha sònjit enni a gren,
P'otramant hoc'h affection am zromplo a dra certain.

AR GOAS.

Me ya brema d'ho tilezel evel ur Gananeen ,
Mes me a grio muio-ous-mui qen na gléfot va feden,
Ha pa ho po va approuvet ha gouét ha me ho car,
E teufot neuze d'am c'harout gant ur galon hep e far.

AR PLAC'H.

Caer hoc'h heus clasq va zistrei gant ho comzou cloqant,
Rac me a vo en hoc'h enep da vigen ferm haconstant ;
Qen e tisplantfac'h ar steret demeus an én gant ho tent,
Evit n'o pe va distroet den yaouanq, dre nep sort hent.

AR GOAS.

Pel a zo demeus a amzer ec'h exercen an enor -
Alies demeus a veach, va mestrez, da doul ho tor ,
Da guichen toul dor ho calon , o clasq antreal enni,
Mes c'hui a so qen diréson, hac a zeu d'am refusi.

AR PLAC'H.

Pel amzer a zo tremenet ha qeit all a dremeno ,
Biqen james var va speret nep réson sur n'ho pezo.
Me ho ped deut d'am dilezel, rac-se-ta choasit ho plac'h
Biqen james n'o qemeràn credit ar pez a laràn dac'h.

AR GOAS.

Evit ho contraign d'am c'haret, me ho ped da viana
Da sònjal voamp hon daou choaset gant Adam, hon Tad qenta ;
Demeus al lezen naturel am c'hontraign d'ho caret ive,
Lennet e demp en A viel, gout a rit se coulz ha me.

— 8 —

AR PLAC'H.

Eleal assur, den yaouanq, certen ho carout a ràn,
Pa é guir ho meulàn bemde d'ar merc'het eus ar vrò-mâ ;
Ma vijent em possession, c'houi pije'r c'hoas anezo,
Mes evidon me a bromet birviquen sur n'ho pezo.

AR GOAS.

Preciussa tensor un den é certen ur galon bur,
Qementse a zo qer guirion evel ma zé ar Scritur :
C'houi é va zenzor, va mestrez a Rouanez va c'halon,
Ha mar don-me deut d'ho quelet, é gant güir intantion.

AR PLAC'H.

Me oc'h anave, den yaouanq, evit un den drol meurbet,
Dre moc'h eus laqet ho speret da garet nep n'ho carqet ;
Mes choasit un all evidoc'h a ouffe ho consoli,
Rac evidon n'allàn pelloc'h chom amàn da ziscouri.

AR GOAS.

Ho quittât a ràn, va mestrez, pa é ret ho tilezel,
Mes evit se va amitie a vezo bepret fidel ;
Poent é demp eta conclui, finissa ha lavaret
Peos é fachus da un den carout hep beza caret.

AR PLAC'H.

Ho quittât a ràn, den yaouanq, o rei déc'h evit qentel
Ar c'homzou caër-mâ a lenner ebars er Scritur Santel :
Choasit Rouantelez Doue hac e justic da guenta,
Qent ma vezo déc'h accordet hoc'h oll dezir er bed-mâ.

FIN.

E Montroulez, e ty LÉDAN, ru ar Pave.